


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn.....	2
	Petra nevez ?	8
	Kelaouennoù.....	22
	Notennoù	33

Herve LATIMIER

Hell is empty, a Walt Longmire mystery,
gant Craig Johnson,
Penguin Books, 2012,
346 pajenn, \$14




Marteze e vo kavet souezhus a-walc’h ar romant-mañ. Kregiñ a ra gant un istor klasel a-walc’h : tec’h ur prizoniad dañjerus-kenañ e-pad ma oa kaset eus ul lec’h d’egile. Darvoudoù e-leizh. Kalzik tud lazhet e-touez ar boliserien, reoù zo skrapet gant ar muntre... Kregiñ a ra Walt Longmire da vont war-lerc’h an tec’hour. E-unan, er menezioù hag e-kreiz un tempest erc’h eus

ar re washañ. Istor an hemolc’h-se eo peurrest al levr. Ur meskaj fedoù, daveoù da levr Dante, Inferno, ha da gredennoù pobloù Amerindianed zo. Diaes gouzout petra zo gwir ha petra zo “gwe-lidigezhioù”. Sikouret eo Walt gant Virgil White Buffalo, ur c’hCrow, bet gwelet a-raok en *Another Man’s Moccasins* (so *Al Liamm* niv 401), ha n’ouzer ket e fin an istor hag-eñ eo gwir

pe get... Kevrin eta. Ma echu “mat” an istor e chom an haroz gwall dizhet en e gorf hag en e spered. Chom a reer en entremar met war un dachenn laouenoc’h betek ar bajenn diwezhañ : pe-

naos e oar Walt emañ e verc’h o tougen danvez ur verc’hig ? Den n’en doa lavaret dezhañ estreget Virgil... Ha gwir e vefe “bed ar speredoù” ?

The Casual Vacancy,
gant J.K. Rowling,
Emb. Little, Brown, 2012,
504 fajenn, £20



Gortozet e oa al levr-mañ gant ur bern tud goude ar berzh bet graet gant istorioù *Harry Potter*. Ul levr evit tud deuet ! Daoust m’eo bet lennet *Harry Potter* gant kalz tud ha ne oant ket krennarded ken...

« *A big novel about a small town,* » a lenner war ar golo. Aet eo unan eus kuzulierien parrez Pagford da Anaon hag aozañ a reer dilennadegoù evit kemer e blas. Istor ar prantad-se eus buhez ar gêr vihan eo al levr. Itrikoù ; posteloù dizanv gant disoc’hoù skrijus ; brezel e diabarzh ar familhoù, etre ar re baour hag ar re binvidik, etre bugale ha kerent, etre kren-

narded... Spontus a-walc’h eo an daolenn : ur bern traoù kriz hag emzalc’hioù rukunus hag emgar. N’eus ket kalz tudennoù a c’heller kavout dedennus a-hed an istor estreget Barry Frairbrother, an dilennad aet da Anaon, Sukhvinder Jawanda, merc’h ar vezeien pakistanat dilezet gant he zud ha Krystal Weedon. Emañ ar plac’h yaouank-mañ o vevañ er c’harter a fell da dud evel zo dleet Pagford reiñ d’ar gêr vrasoc’h a zo e-kichen... Rak er c’harter-se e kaver tud paour, dizesk alies, dilabour peurliesañ ha feuls a-wechoù. Spontus eo tonkad Krystal. N’eo ket plijus ar plac’h bepred met santout a

reer doujañs ha karantez an aozerezh en he c'heñver. E-touez an tudennoù all ez eus ar re a chom rukunus, pe laosk, pe drouk a-hed an istor, pe an tri asambles hag ar re a zispak tu “sklaer” o fersonelezh nebeut-ha-nebeut. N'eo ket gwall vrav ar gevredigezh a roer deomp da welout met abegoù a gaver da gaout un tamm goanag... Anzav a ran em eus kavet penn kentañ an istor un tamm gorrek gant kalz tudennoù ha nebeut a-walc'h a darvoudoù. Goût a oar J.K. Rowling kontañ istorioù koulskoude ha pep rannbennad a zo skrivet mat en ur yezh pinvidik

Le mal napoléonien,
gant Lionel Jospin,
Le Seuil, 2014,
238 pajenn, 19€



Dreist em eus kavet al levr. Eeun ha nerzhus ar stil, titouret mat hep bezañ borodus. N'em eus ket desket kalz tra met lakaat a ra an aozer ur sklêrijenn didruez war frouezh spontus


(betek re evit ar soazneger dizampart a zo ac'hanon). Ret eo tremen ar prantad-se rak tamm-ha-tamm e ya an istor war-raok hag ar fin a zo leun a zarvoudoù a sikour d'ober e soñj a-zivout pep tudenn. D'am meno, n'eo ket ur bennoberenn met ul levr a zoare memes tra. Ur skrivagnerez eo J.K. Rowling hep douetañs met chom a reer strobinellet c'hoazh gant kurioù ar sorserien marteze. Peadra da lakaat da gavout gorrekoc'h hag ordinal ar romant-mañ.

diktatouriezh Napoleon. Ar fed e vefe bet Lionel Jospin kentañ ministr Bro-Frañs a ro muioc'h a bouez d'al labour. « *J'examine si les quinze années fulgurantes du trajet du Premier consul et de*

l'empereur ont servi la France. Si elles ont été fructueuses pour l'Europe. A mesurer l'écart entre les ambitions proclamées, les moyens déployés, les sacrifices exigés et les résultats obtenus, la réponse est non, » eme an oberour. Pevar chabistr stank evit ober al labour-se. Kendrec'hus. An daou chabistr all a zo kentelius war un dachenn all hini ar “bonapartouriezh” : e *Les métamorphoses du bonapartisme* e lenner

a-zivout mojenn Bonaparte, Napoleon III, Boulanger ha Pétain ; e *L'empreinte du bonapartisme aujourd'hui* e kaver ur geñveriadenn etre Bonaparte ha De Gaulle mat evit an eil hag un toullad mennozhioù war ar saviad a-vremañ (*Un nouveau venu ambigu : le populisme ; La démocratie hors la crise*). Ul levr da vezañ lennet evit kompren gwelloc'h pouez an istor war ar pezh a vever hag ar c'hentelioù a ro deomp.

**Jésus après Jésus,
L'origine du
Christianisme,**
gant Gérard Mordillat
ha Jérôme Prieur,
Le Seuil, 2004,
400 pajenn, 21€



Anavezet eo Gérard Mordillat ha Jérôme Prieur evit an heuliadoù savet ganto evit *Arte* (*Corpus Christi, L'Origine du Christianisme* ha *L'Apocalypse*). Anat eo e fell dezho burutellañ ar sell kristen ha dreist-holl hini ar gatoliked war istor an Iliz. A-wechoù betek re : an ton implijet a ya en tu-hont da hini un

enklask evit dont da vezañ hini ur flemmskrid. Studiet o deus an danvez gant aked. N'on ket sur e anavezfe kalz kristenien ar skriturioù evel ma tiskouezont ober. Penn kentañ istor an Iliz eo danvez al levr ; meur a gudenn a bleder ganto el levr. Penaos eo bet savet an testennoù ? Piv en deus skrivet anezho ?

Pegoulz ? Pet skrivagner ? Gant piv emañ an aotrouniezh ? Plas Iliz Jeruzalem ? Perzh familh Jezuz (Mari ha Jakez da gentañ) ? Penaos ha perak e tro an Iliz war-du an nann-juzevien hag an hollvedelezh ? Perzh heverk Paol. An darempredoù etre ar gristenien a orin juzev hag ar re all. Diskar Iliz Jeruzalem (ar juzev-kristenien). Pêr, Jakez, Lukas ha Paol a lenner kalz diwar o fenn. Paol dreist-holl. An testennoù meneget ar muiañ a zo ar *Pevar Aviel* evel-just met, dreist-holl, *An Aktoù* ha *Lizhiri Paol*. Klasel eo lakaat en a-raok an dislavarioù a gaver enno. N'eo ket se ar pouezusañ. Santout a reer mat ar c'hudennoù a savas pa gomprenas diskibled ar C'hrist n'errue ket fin ar bed ken buan hag o doa soñjet. Diskouezet e vez an tabutoù diabarzh, an enebiezhoù evit ar galloud en “emsav kristen”, an dibaboù graet tamm-ha-tamm e-keñver an testennoù a zeu da vezañ “kanonek” hag an doare d'o lenn. Gellout a reer bezañ hegaset gant ar sell diavaez ha buruteller pa vezer kristen, met ne ra ket droug gwelout alioù all estreget ar “mouezhioù aotreet”. Gant ma chomer war dachenn un daellañ digor. Evidon e chom daou

zanvez preder pouezusoc'h eget ar re all : an darempredoù etre an Iliz hag ar galloud roman (hag ar re all da c'houde, siwazh...) hag an darempred etre kristeniezh ha juzevelezh ha perzh an Iliz e diazezadur an enep-juzevelezh. Daou dra am eus kavet souezhus er fin. Ar perzh a vefe bet hini ar juzev-kristenien e ganedigezh an Islam hervez an aozerien : troioù gwidre an istor... Hag ar frazenn-mañ er c'hlozadur : « [...] *le christianisme est une aberration historique, comme on qualifie en physique un phénomène qui, logiquement, ne devrait pas se produire* ». Ur burzhud eta !

**La Bretagne, un horizon
démocratique pour
notre République,**
gant Daniel Cueff,
Le Temps Editeur, 2014,
128 pajenn, 13€



Setu ul levr a-bouez. N'eo ket ken teknel hag hini Jean-Jacques Urvoas en deus votet enep ar mennozhioù displeget gantañ en e levr (so *Al Liamm* niv 407). Diazezet eo an oberenn-mañ war ur preder ledanoc'h a-zivout ar gevreadelezh, an emrenerezh, an demokratelezh er bed a-vremañ, hini ar rouedadoù. Kavout a reer e penn kentañ al levr ur rakskrud gant Romain Pasquier eus Skol-Uhel Skiantoù Politikel Roazhon. C'hwec'h chabistr evit displegañ penaos e c'hell Breizh bezañ un dachenn skouer evit diorren ur sell nevez war an demokratelezh gant ur benveg : Bodadenn Vreizh. Diskouez a ra mat er chabistr 5 dañjerioù ar meurgêrioù ha teoriennoù kamm Laurent Davezies, an DATAR hag un toullad re all. N'heller ket bezañ ali gantañ war an holl


grafoù met kavout a reer mennozhioù sklaer, troet war an dazont. Ur prantad start a vever. Ur preder evel hemañ a zo ur benveg stourm a-feson.

PETRA NEVEZ ?



**Herve LATIMIER &
Malo BOUESSEL du BOURG**

Emsav hag istor,
gant Gwenael Maze,
Aber,
184 fajenn, 13€



Daoust pegen diaes e ve splujañ e *Emsav hag istor*, en abeg d'ar gerioù arnevez a builh ennañ, ez eo ret-mat lenn levr Gwenael Maze betek penn. N'eo ket alies e vez kinniget deomp boued spered ken fonnus a-zivout istor an Eil Emsav (eus 1920, niverenn gentañ *Breiz Atao*, betek 1946, barkedigezh Roparz Hemon)

hag heuliadoù mat pe fall ar prantad-se hiziv an deiz.

Er pennad kentañ e vez studiet argerzh-arallekaat Breizhiz dindan levezon ar Stad C'hall, a ginnig dezho « distruj o ene evit kaout digor er sevenadurezh arnevez ». Un touell n'eo ken : « mar ranker arallekaat evit sevenaat ne c'haller ket sevenaat, rak tud arallekaet zo er-maez a bep

sevenadurezh ». Er saviad-se e oa diwanet *Breiz Atao*, pa lavaras nann d'an enteuz er bed gall. Met pobl Vreizh « ne ziskouezas ket an disterañ c'hoant da gemer hent an dispac'h ». « Pa 'z eo prederiet pep hini da ziverkañ ennañ e-unan an diwezhañ elfenn a vrezhonelezh ez eo dic'houzañvadus klevout tud o lavarout e tleer sevel ur Stad Vrezhon ha ledañ ar brezhoneg d'ar vro en he fezh. » War dachenn ar yezh hag al lennegezh e voe graet strivoù bras gant Roparz Hemon ha skipailh *Gwalarn* « da glask kompezañ an islonk etrezo ha pobl Vreizh ». Savet e voe *Kannadig Gwalarn*, ar *brezhoneg eeun*, *Arvor...* en aner. Morse ne deuas ar bobl da gompren *Breiz Atao*, na tud *Breiz Atao* da gompren ar bobl, gouez da wGwenael Maze. Un disouezhadenn e voe pep taolarnod. Neuze eo e risklas Mordrel war hent ar mennozhioù faskour, hag a ziskoueze ober berzh en Alamagn hag en Itali... Mar deo « dic'houest ar bobl da gavout hec'h-unan hent ar mad, dlead ar re wellañ eus he mibion eo he lakaat dre

gaer pe dre heg war an hent-se ». An dispac'h a vo kaset da benn enta « daoust d'ar boblañs ha zoken a-enep dezhi ».

Daoust ma vezer boas, en Trede Emsav, « da varn garv an Eil Emsav politikel » e tiskouez Gwenael Maze en deus an « nann d'an arallekaat », distaget gant *Breiz Atao*, graet e hent e emskiant ar bobl, petra bennak ma oa bet distaolet-groñs ganti dre berzh dibaboù ur bihanniver a-du gant an arme alaman. « Lakadenn *Breiz Atao* : mennet eo pobl Vreizh da vevañ, zo o tont da wir dindan hon daoulagad ».

Eil ha trede pennad arnodskrid Gwenael Maze a zo gouestlet da Roparz Hemon ha d'e bezh-c'hoari *Un den a netra*. Intret e oa Roparz Hemon gant pennaenn an engouestl hag an atebegzh, a voe gerioù stur an Eil Emsav. Hervezañ ez eo ar Vretoned o-unan, er penn kentañ, a zo atebek war ziskar o bro. Ar mennozh-se a ranne gant e vignon Yann Sohier a embanne : « Abaoe ur c'hantved, ez ompenem c'hraetkenwallerion an impalaerouriezh yezhel... ».

Fallagriezh ar Stad ne zisamm nikun eus e atebegzh. « Anat eo ne vo ket savet ar yezh gant ar re a fell dezho he distruj. » Sed a skriv Roparz Hemon war *Arvor* e 1942 : « Mat eo goulenn, azgoulenn, goulenn hag azgoulenn c'hoazh digant ar re o deus ar galloud warnomp evit ar mare, hogen al labour bras, al labour gwirion, ne vo sevenet nemet ganimp, nemet ganimp-ni hon-unan ». Ken gwir all eo hiziv an deiz, eur techet da grediñ... « Ar frankiz, evit Roparz Hemon, a zo un dra na legader ket d'ar Stad, d'un aozadur, pe d'ur salver. » Se a vo diskouezet splann gant pezh-c'hoari Jakez Riou, *Nomenoe-Oe !* : « Nomenoe zo henozh kement Breizhad kalonek en deus argadet evit ar vro ». Disfi en deus maget Roparz Hemon ouzh nep galloud a-hed e vuhez : « Ne garan ket ar gasoni a lakaont en o stourm » a zispleg er *Vugale fall*. Dodenn *Un den a netra* an hini eo, a zispleg Gwenaél Maze : « Tostaat d'ar galloud zo pellaat diouzh pep uhelvennad, diouzh pep denelezh zoken ». Er pezh-c'hoari berr-se en em zistruj ur miche-

rour goude bezañ drouklazhet un den war gourc'hemenn rener ur gelaouenn, e anv un uhelvennad ha ne gred ket penn-bras ar gelaouenn ennañ ken abaoe pell. Diskred a vag Roparz Hemon ouzh ar politikerezh ivez. Kavout a ra dezhañ e vez roet re a bouez d'ar stourm politikel gant an emsaverien. Re zon eo aet an droug evit ma ve a-walc'h gounit ar frankiz politikel. Ar pep pouezusañ eo dieubiñ ar speredoù : « Saveteet e vo Breizh en deiz m'hor bo desket d'hor c'henvroiz lenn ha skrivañ hor yezh ». Un hir a stourm, hep ket a var, « padal an trec'h n'eo ket dibenn ar stourm ; ar stourm eo a zo an trec'h ».

Ur pennad all a bled gant « Istor ha kealiadurezhioù en Eil Emsav ». Eno e vez diskouezet gant Gwenaél Maze eo bet an Eil Emsav kalz dieupoc'h diouzh nep galloud eget na soñjer alies. Lakaat a ra kemm etre pennmennozhioù Roparz Hemon, Duhamel ha Mordrel. Ur rannbennad eus ar pouezusañ a zo titlet *A-enep al lanv*. Eno e tiskouez penaos en deus miret Roparz Hemon ur

spered dizalc'h, pa grede meuliñ e vignon Yann Sohier, a oa anavezet e vennozhioù komunour gant ar galloud. Embann a reas Roparz Hemon skridoù Mazeas, a oa yuzevez e wreg, peotramant skridoù Abeozen a-zivout spered araogour Ben Yehouda war dachenn ar yezh arnevez en Israel. Ober a reas goap ouzh doareoù trevadenel ha gouennelour Bro-C'hall en e *Cours élémentaire de breton* (kentel 35). Embann a reas ar mod arverañ ar gwagennoù berr evit degemer skingasadennoù radio diwar ar bed a-bezh e-kreiz ar brezel (Erwan Tromeur, *Gwalarn* 148-149, 1942). Meuliñ a reas an Amerikaned a ouie sevel « pontoù Bras » goude ma oa bet disklêriet ar brezel dezho gant an Alamaned... Ne ziskouez nep azeulerezh ha nep meveliezh e-keñver an Alamaned, en enep d'ar c'hazetennoù gall d'ar mare-se.

Ar pennad diwezhañ a gas ac'hanomp un tammig pelloc'h en istor. Eno ez eus anv a sklaverezh ha dispac'h en Amerika hag e Frañs. Keñverioù dedennus a zo graet etre

an div vro-se. Persolenezh Jefferson a zo studiet pergen. Gantañ eo e oa bet skrivet *Disklêriadur Emrenerezh* ar pevar a viz Gouere 1776. Perc'henn da sklaved e oa, evel Washington. Betek fin e vuhez e chomas gouennelour. Sed ar pezh a zisklêrie a-zivout statud ar sklav : « Ur wech frankizet e ranker e bellaat evit parraat ouzh nep kemmesk »... Tro en doe Jefferson da chom e Frañs e-pad pell, ha test e voe d'an Dispac'h Bras. Kantreizhañ a reas torfedoù prantad spontelour Dispac'h Frañs en ul lizher ma tispleg e oa kement-se ar priz da baeañ... Prest e oa da zistruj an denelezh a-bezh evit tizhout e uhelbal. « O loc'hañ diouzh ur c'heal trabedel lakaet da bal an istor, e tres un hent kemeret gant dispac'herien Frañs hag a vo heuliet gant o diskibled en ugentvet kantved. »

MBdB

**Bigorned-sukr ha
bara-mel,
gant Fañch Peru
Skol Vreizh
136 pajenn, 10€**



Gant ar romantig-mañ ez adkaver Herve, ur paotrig hor boa graet anaoudegezh gantañ e *Gwaskado*, e ti e dud-kozh (anv ur romant bet embannet gant *Skol Vreizh* e 2004). Setu Herve oc’h adkavout e dad, e vamm, e vreudeur gevell hag e dud-kozh a-berzh tad e Kerspern, ur gêriadenn vihan e-kreiz maezioù Bro-Dreger. Buhez ur paotrig war ar maez n’eo ken : e c’hoarioù, e gamaladed, e familh, hag Anna, ar plac’hig vouilh-se a domma e galon outi. Ha koulskoude on bet plijet gant *Bigorned-sukr ha bara-mel*. Plijet gant brezhoneg dibistig Fañch Peru, liv Treger warni. Ur c’heriaoueg, e fin al levr, a zo displeget enni ar gerioù micherel pe rannvroel nebeutoc’h anavezet. Plijet on


bet gant an testeni eus ur bed aet da get abaoe tri-ugent vloaz : botaouer-koad eo tad Herve. E droioù-micher a zo displeget dre ar munud. Diskouez a ra an aozer bezañ troet gant al labour-dorn. Bourrañ a ra o kalfichat kenken. Evel-just, seurt levrioù eñvorioù a zo bet embannet stank-ha-stank c’hoazh. Ha n’eo ket an darvoudoù eo a ro buhez d’an dezrevell. Re sioul al levr er c’heñver-se marteze, pa geñverier gant chañsoù *Pikou Mab e dad*. Ur saour hep e bar a gavan gant skridoù Fañch Peru evelato, hini an deneridigezh. An aergelc’h madelezus-se a vez intret an tudennoù gantañ. Un elfenn sakr a santer ivez, stag ouzh ar bugaleaj. Degas a ra koun eus *Ar Bugel hag ar stêr*, gant

Henri Bosco. Hiraezhiñ a reer o tigeriñ gant Fañch Peru rideozioù dislivet an amzer war leurenn e oad tener, rak sur mat eo awenet e skrid gant envorennoù personel e mod pe vod. Splannaat a ra furnez an tad-kozh kantreat ha noblañs e galon. Unaneusarvarvailherien ziwezhañ eo-eñ, teñzor an hengoun o virvilhañ en e dondonañ. Santet e vez ar bed o cheñch dousigoù. Emañ rod ar vodernelezh o kemer e lañs,

prest da flastrañ nep barzhoniezh e anv an aezamantoù. Trec'h meur ar formika... Erfin on bet plijet gant kened an natur, a zifluk, uvel ha gwir, dindan bluenn Fañch Peru. Gant skoazell ar pemp skiant e lenner *Bigorned-sukr ha baramel*. An natur-se, a oa kavell ha skrin ar gumuniezh, he deus paeet he dle d'an Ankoù...

MBdB

Kegid d'ar gousperoù,
gant Peter Tremayne,
brezhoneg gant
Jean-Michel Mahe,
Ninnog Latimier hag
Herve Latimier,
Aber,
450 pajenn, 17€



N'eo ket mui dianavez C'hoar Fidelma d'ar vrezhonegerien. Troet ez eus bet e brezhoneg daou romant diwar pevar warn-ugent (*Koulm ar marv*, *Absolven dre Vuntr*) ha meur a zanevell bet skrivet e saozneg gant Peter Tremayne (anv-pluenn Peter Berresford Ellis), anezhañ ur skolveuriad

hag un arbennigour war ar Gelted kozh, er seizhvet kantved pergen, da lavarout eo ar prantad ma ren Fidelma hec'h enklaskoù. Ne oa ket gwall stabil c'hoazh levezon Roma war an Iliz Keltiek d'ar mare-se, hag ur reizhiad lezennoù dedennus-kenañ a vez displeget deomp dre hanter-

ouriezh ergerzhadennoù al leanez Fidelma, hor gwiraourez, breutaerez, ha detektiv muiañ-karet ! Er pemvet danevell dastumet e *Kegid d'ar gousperoù*, e vo dirouestlet he amrinoù kentañ gant Fidelma. Framm an danevelloù a vez atav ar memes hini, war-bouez nebeut. Amveziadoù ar muntr, artersadennoù Fidelma, displegadennoù ha diskoulm. Alies e seblant anat d'an holl dudenoù identelezh an hini kablus er penn kentañ, en un doare eeunig betek re (en danevell *Muntr en diskuizh* da skouer)... Dislavaret e vint gant Fidelma evel-just, a ouio prouiñ n'eo ket an hini a oa diskred warnañ a oa an hini kablus. Itrikoù liesseurt-tre a zo bet ijinet gant Peter Tremayne, ken e vezer broudet dalc'hmat gant an debron gouzout. Kenkoulz eo *Ur C'hantik evit Wulfstan* ha *The murders in the Rue Morgue* gant Edgar Allan Poe. Penaos eo deuet a-benn ar muntrer da vont er-maez eus ur gambr barrennet he frenistri ha sparlet he dor ? Met ar pep plijusañ eo an aergelc'h a oar livañ Peter Tremayne berr-ha-berr, santad an natur (e *Muntr dre Vurzhud*

da skouer), ha tudenoù o fersonelezh kreñv. Nag a blijadur a-hend-all bezañ splujet e bed ar Gelted kozh-se, ma oa ken disheñvel o lezennoù hag o hengoun. Ur bed kriz a-wezhioù, met Fidelma a ziskouez furnez ha hegarated, en tu all d'he gouiziegezh, rak « lezenn ne vez ket bepred reizhded »...

MBdB

**Moueziou stourm
dastumet,
gant Maguy Kérisit,
Emgleo Breiz,
56 pajenn, 10,90€**



Sed pempvet levr an dastumad *Moueziou*, a oa bet kroget gant *Moueziou Indianed* e 2000. Gant *Moueziou stourm* ez adkaver ur vaketenn a-feson hag ur roll bommoù berr hag arroudoù broudus. Ar rannbennad diwar-benn ar gwez (p.48), da skouer, skrivet gant Herman Hesse, a zo eus ar re vravañ : « Stourm a reont gand oll nerz o buhezioù a-benn eun dra hepken : bleuñvi diouz o lezennou dezo, sevel o stumm, en em daolen-ni ». Pal an dastumad nevez-se n'en deus ket cheñchet neuze : « rei d'al lennerien vrezonég, en or yez, eun tañva deuz furnez lennegel ar bed ». Tem ar stourm a zo unan a-bouez ha n'eo ket bet re ziaes, moarvat, dastum danvez al levrig-se, ken liammet e vez ar stourm


ouzh buhez Mab-den. « Neb a stourm a vo koll marteze, med neb na stourm ket zo koll dija, » a embanne Brecht... Tud vrudet-bras ha reoù nebeutoc'h anavezet he deus diskoachet Maguy Kérisit. Un dibab personel eo, evel-just, ha gwell a-se : « Komz er henta gour eo ar galonegez nemeti » hervez Arthur Adamov. Dipitet on bet avat gant kement-mañ : n'eus arroudenn ebet a-zivout ar stourm evit ar yezhoù bihan hag ar brezhonég peurgetket. Peder arroudenn gant ar brezhonég Visant an Askol a zo bet dibabet avat, tennet eus e levr *Kanouennoù ha barzonegoù stourm* (embannet gant *Emgleo Breiz*), met n'int ket eus ar c'hentañ troc'h, pa vo lavaret gwir. Ha brezhonég ebet estregetañ. N'eus ger

ebet a-berzh ar stourmerien o deus gouestlet o buhez d'ar brezhoneg... Ne vije ket bet gwall ziaes kavout arroudennoù gant Yann Sohier paneveken... Peotramant Anjela Duval : « Stourm a ran war bep tachenn » ! A-hend-all em bije kavet splotus kaout displegadurioù berr, e-giz ma

oa bet graet e fin *Moueziou merhed*, diwar-benn ar skriva-gnerien meneget : o bro orin, pegoulz int bet ganet, o micher bet... pep a ziv linenn. Plijustre al levr, eta, koulz hag ar re all, met skortik an traoù marteze...

MBdB

**Collecteur de contes en
Basse-Bretagne,
War hentoù ar
c'hontadennoù,
gant Yann-Fañch Kemener,
Yoran embanner,
504 fajenn, 35€**



Ur pezh mell labour a ginnig deomp *Yoran embanner* amañ. Frouezh al labour dastum kontadennoù bet sevenet gant Yann-Fañch Kemener e-pad meur a vloavezh e Kreiz Breizh. Troet en deus an holl destennoù e galleg ha kinnig a ra anezho evel m'en deus o c'hlevet ha n'eo ket er yezh standart. Displegañ a ra e zibab. Reiñ a ra d'al levr un tu skiantel, a c'hello pellaat an deskarded eus an oberenn. Ret eo marteze

tremen dre seurt hentoù evit mirout teñzorioù sevenadur komzet pobl Vreizh evit an dazont. Mard eo prizius evit ar yezhourien e c'hell degas plijadur da galz. Kinniget brav-kenañ eo al levr. Sklaer, skeudennaouet kaer ha keinet gant un danvez gwevn ha plijus.

HL

**Katekiz an Iliz Katolik,
Diverradur,
Brezhoneg gant
Job Lec'hvien,
Imbourc'h,
254 fajenn, 20€**



Da heul embannadur klok *Katekiz an Iliz Katolik* e 1992, anezhañ ur pikol levr 676 pajenn, e oa bet savet un diverradur anezhañ e 2005, war atiz Yann Baol II, dindan renerezh Joseph Ratzinger, a oa *Cardinal* d'ar mare-se. Lakaet eo bet an destenn-se e brezhoneg gant Job Lec'hvien hag emañ o paouez bezañ moulllet gant *Imbourc'h*. Feal eo an diverradur ouzh stumm ar c'hatekiz klok (heñvel ar pennadoù bras, daveoù da rannbennadoù ar stumm orin), met berroc'h a-galz evel-just, pa c'hoarvez e 254 fajenn. An doare da ginnig an danvez a zo disheñvel ivez. Muioc'h a skeudennoù displeget a vo kavet ennañ ha dreist-holl ez eo bet aozet an destenn en un doare kendivizel, evel ar

c'hatekizoù hengounel hon eus anavezet pa oamp bugel, nemet evit an dud deuet eo bet savet ar goulennoù hag ar respontoù : Pehini eo mennad Doue war an den ? Perak ez eus en den ar c'hoant eus Doue ? Ha gallout e c'heller anavezout Doue gant sklêrijenn ar skiant nemetken ? Perak e aotre Doue an droug ? ... 598 goulenn ha 598 respont en holl. Respontoù a vo kavet un tamm reut a-wezhioù, gant ar berr hag an divrall ma 'z int evit un den a-vremañ, c'hoant gantañ sevel goulennoù nevez d'e dro... Gant sikour ar mene-ger e fin al levr ez adkaver aes-tre an temoù eur dedennet ganto. Rannet eo al levr e peder lodenn : *Disklêriadur ar feiz, en-dro d'ar Gredo ; Lidadurezh ar c'hevren kristen, en-dro d'al liderezh ha d'ar*


sakramantoù ; Ar vuhez er C'hrist, en-dro d'ar gour-c'hemennoù ha d'an doare da ren hor buhez ; Ar bedenn gristen, en-dro d'ar pedennoù pennañ.

Ur c'hendod pleustrek eo al levr-se. Ne vank nemet ur c'heriaoueg, pa vez kalzik a dermenoù arbennik ennañ. Lod

eus al lennerien a raio gant ar c'hatekiz-se evit mont donoc'h en deskadurezh kristen, lod all a raio o mad anezhañ evit kompren gwelloc'h ar sevenadur kristen. E blas en deus an oberenn-se en holl levraouegoù da'm meno, pe e vefec'h kristen pe get.

MBdB

**Le trésor du breton
rimé,
Rimodelloù an dud
hag an amzer,
gant Daniel Giraudon
Emgleo Breiz,
304 fajenn, 18,90€**



Setu pempvet levrenn dastumad rimodelloù Daniel Giraudon : *Rimodelloù an dud hag an amzer*. Hemañ zo bet o foetañ bro abaoe daou-ugent vloaz a-benn profañ deomp an eostad fonnus-se, dre Vro-Dreger peurvuiañ, met war un dachenn ledanoc'h ivez gwezh-ha-gwezh all. Bewech e vez meneget, da heul ar bommoù rimet, ar barrez m'int bet pennaouet. E penn kentañ al


levr ez eus un toullad evezhiadennoù a-zivout perzhioù dibar yezh Treger. A-bouez eo anavezout bed ar rimodelloù, ken intret e oa ar brezhoneg hag ar vrezhonegerien ganto. E pep degouezh e tiflue ur bomm rimet ken e voe skrivet gant Anatol ar Braz : « E Breizh, pa vez kistion da gomz, e vez peurvuiañ gant gwerzennoù 'vez graet gant an dud, ur stumm

muioc'h naturel ha boas evit ar yezh plaen ». Tro spered ar Vretoned en em ziskouez enno neuze. Teñval o fenn ? Tamm ebet. Int a oar c'hoarzhin pe flemmañ, ha c'hoari dizehan gant ar yezh. Ur sport a ziskouez bezañ diouzh doare ar pennoù-breton, rak « an hini a zo lemm beg e flemm, 'rank bezañ kalet korn e benn » ! Sed ur veaj nevez e puñs

memor ar bobl eta. Ar wech-mañ e vo anv eus prologoù ha lostoù ar marvailhoù, eus furnez ar bobl, eus an amzer o tremen miz-ha-miz, eus ar micherioù hag eus ar boued. Ampl ar falc'had neuze. Kit war seulioù Daniel Giraudon, rak « ret eo lemmañ a-raok flemmañ »...

MBdB

Opération Revival 946,
gant David Le Yaouang,
Yoran embanner,
184 fajenn, 12€



Klotañ a ra muioc'h *Opération Revival 946* gant ar pezh a c'hortozer eus ur romant “polis” eget *Les damnés de Ceallach*. Plijus eo da lenn, kalz darvoudoù a zo, un tamm fent ivez. N’eo ket dreistordinal an istor : dodenn poliserien o kemer plas ar varnerien a gavont re wak a vez kavet alies el lennegezh pe er sinema.


N’eo stag an istor eus Iwerzhon ha Breizh nemet dre bersonelezh tudennoù ’zo. Gellet o dije bet bezañ liammet ouzh Kurdistan, Korsika pe unan eus broioù kreiz Europa pe re Slaved ar Su, n’en dije ket cheñchet kalz tra... An nebeud a lenner diwar-benn istor Breizh a zo un tamm souezhus : netra war an

dachenn “bolitikel” etre Bezen Célestin Laîné hag an FLB (p.104) ; un tamm berr neketa... Ha bepred romantelezh ar feulster hag ar brezel... Goût ouzon ez eo ar feulster un dra ret pe dost en ur romant polis met hegaset on o welet liam-

moù ouzh ar stourm evit gwirioù ar Vretoned evel-se. N’eo nemet ur romant dudi eüruzamant ha tremen ar reer ur prantad amzer dibreder ouzh e lenn. Tizhet eo ar pal-se...

HL

**Warhoaz marteze...,
Demain peut-être...,
gant Charlez an Dreo,
Emgleo Breiz,
134 fajenn, 13,90€**



Kavet e vo e *Warhoaz marteze* testenn ar c’hanaouennoù a ya d’ober ar bladenn *Deiz al lid* gant Laz-kanañ Penn-ar-Bed, embannet gant *Keltia musique*. Skrivet int bet e brezhoneg gant Charlez an Dreo, ha troet e galleg gantañ ivez, war-bouez un toulladig anezho hag zo bet amprestet digant arzourien all : Gilles Servat, Antony Lhéritier, Jean-Jacques Goldman, Idir, Dan ar Braz, Danielle Messia, an Tri Yann... N’eo ket an testennoù


diwezhañ-se troidigezhioù ger-ouzh-ger. Redioù al lusk hag ar c’hlotennoù a zeu da gentañ pa vez anv a sonerezh. Deuet eo brav gant Charlez an Dreo avat, gant kanaouennoù evel *Bugel er brezel* (diwar Goldmann) pe *Digor din dor da di* (diwar Idir). Brezhoneger a-vihanik eo Charlez an Dreo. Kelenner eo hanter-amzer hag e karg eus ar brezhoneg hag ar sevenadur evit skolajoù ha liseoù prevez Breizh. Kenlabouret en deus gant Kristian

Desbordes, rener Laz-kanañ Penn-ar-Bed. Loreet e oa bet frouezh o c'henlabour e 2008 gant Priz Meur ar Bladenn, deroet gant an *Telegramme*. Ken liammet eo ar sonerezh ouzh ar c'homzoù ma n'eo ket gwall aezet barn ur ganaouenn anez he c'hlevet. Gwellañ tra d'ober enta eo prenañ ar brav a bladenn-se. « On bed deomp-ni, hirio, a vev dre barzonegou Charlez amañ, » a skriv Mari Kermareg en he fennad-kinnig. « En ur bed debret gant ar skarzhañ kuit, an digasted, an dispriz, ar gasoni, ar feulster, ar sponterezh, e fell deomp, diwar kanaouennoù an albom-se, enaouiñ un elfenn esperañs, hon laka da grediñ e c'hell hag e rank bezañ eus ar c'henlodañ, ar c'hendoujañs, ar garantez, ar pardon, ar vignoniezh hag ar fest etre an dud hag etre ar pobloù, hiziv ha warc'hoazh, amañ hag e lec'h all, » a embann skipailh al laz-kanañ. E-keñver lennegezh, ne lakafen ket an holl destennoù par-ouzh-par. Lod a zo gwan pe wanoc'h : gwerzennoù evel *E miz Genver an erh zo kaer, E miz Gouere e vez tomm-tre* da skouer. Barzhoniezh Charlez

an Dreo a zo uvel hag onest avat, hag arabat disoñjal ez eus eus e varzhonegoù broñsennoù tonket da vleuniañ war muzelloù ar goridi.

MBdB

KELAOUENNOÙ



Malo BOUESSEL du BOURG
Jerom OLIVRY
Tudual HUON

> Bremañ (399)

Kregiñ a ra niverenn 399 **Bremañ** gant ur pennad diwar-benn Ebola, ar c'hleñved-red spontus a vez o falc'hañ kement a vuhezioù en Afrika. Eus pelec'h e teu ? Peseurt pouez o deus kemeret ar mediaoù er sikour bet roet d'ar broioù tizhet gant ar viruz ?

Lenne a reer ivez ur pennad diwar-benn al luskad *Pegida* en Alamagn. Abaoe un nebeud mizioù ez eus bet aozet meur a vanifestadeg gante a-enep an estrañjourien dre vras. Sed aze un doare da gomz diwar-benn mennozhioù a weler o tiwan en Europa a-bezh...

Kenderc'hel a ra ar stourm a-enep ar Marc'had Treuz-atlantek, tamm-ha-tamm, goude bezañ sinet, e miz Gwengolo 2014, un Emglev Hollek etre Kanada hag Unaniezh Europa. Yves Jardin a zispleg deomp an afer luziet-se a vo klevet kaoz diwar he fenn c'hoazh !

Teuliad ar miz a zo gouestlet d'ar Galloud hag « a vrein an

den », Robespierre da skouer. *Assassin's Creed*, ar c'hoari-video mil anavezet gant ar re sot gant seurt c'hoarioù en deus lakaet Jean-Luc Mélenchon da glemm abalamour d'an doare m'eo bet taolennet an dispac'hour gall ennañ. Un abeg a-zoare evit lenn an teuliad a zispleg deomp penaos e c'hall « an den » cheñch penn d'ar vazh en ur dañva ar galloud.

Ur pennad a lenner da heul diwar-benn an tailhoù lec'hel, ken direizh. Ur strollad-labour a oa bet krouet dindan renerezh

Jean-Marc Ayrault met chomet e oa diefed e labour.

Aet eo Guy Etienne da Anaon d'an oad a 87 vloaz, e labour evit ar brezhoneg hag e vuhez a zo displeget gant Laorañs Motro.

Echuiñ a ra niverenn **Bre-mañ** gant ur pennadig evit kelaouiñ al lennerien e c'hellint adkavout ar gourharoz Paotr Louarn (hag eñ er gelaouenn *Louarnig* abaoe 2011) en ul levrenn bet embannet gant *Keit Vimp Bev : Paotr Louarn, Nozvezh al louarn*.

JO

> **Al Lanv (133)**

Lenn a c'heller un toullad pajennadoù en eñvor Riwanon Kadored aet da Anaon ha hi tregont vloaz nemetken.

Yann Talbot a ginnig deomp daou bennad : da gentañ un homelienn bet distaget gantañ e Chapel Itron Varia an Iskuit e Plouha ha goude-se ez eo lodenn gentañ ur brezegenn bet distaget gantañ e skol-veur Aberystwyth : *An etregeltiegezh en XIX^{vet} kantved*.

Tour Babel a zo bet skrivet gant Fañch Kerrain. E levr ar

Geneliezh (Ar Bibl) e kaver ar skrid diwar-benn Tour Babel ha diouzh a lavar F. Kerrain ez eus meur a zoare da lenn seurt skrid : daoust ha posubl eo e vije ken gwarizius un Doue ma tiskarje raktresoù an dud evit mirout e hollec'halloudegezh ? Memestra e c'heller kompren « e kav gwelloc'h ar C'hrouer ar gendoniezh eget an unded. Disfiz a ranker kaout diouzh ar c'hoant a unded, anezhañ alies un hunvre feuls ha gwaskus ». Michel Onfray, prederour gall, a zo e-touez ar re a lenn skrid *Tour Babel* ger evit ger. Doue

a daol e vallozh war ar bobl, a laka skignañ ur bern yezhoù all evel ur c’hatiz. Gant-se e c’hell M. Onfray skrivañ « ar yezhoù “rannvroel” n’int mat nemet da hadañ disranniezh en ur vroad, dre ma ne vez ket ar geodediz evit en em intent etrezo ». « Al liesegezh a zo buhez ; an unneuziadur a zo marv, » eme F. Kerrain evit klozañ e bennad.



Erwan Gedour en deus skrivet ar pennad hirañ er gelaouenn : *Danevelladur bloavezhioù kentañ stourmoù SAB : skouer ar panellerezh hentañ e brezhoneg (div-yezhek) ?*

« Gall a reer prenañ skiant diwar darvoudoù an amzer

dremenet, » eme aozer ar pennad. Displegañ pizh a ra E. Gedour peseurt endro a oa e Breizh tro ar bloavezhioù 80. Abalamour da lod tud kalonek ha pennek ez eus bet roet lañs da stourmoù zo. Barnet kriz e voe lod anezho ha kondaonet da vloavezhioù toull-bac’h (Herve Kerrain ha Bernez Korbel da skouer, o doa nac’het ober o servij soudard ha dirak ar varnerien o doa nac’het komz galleg).

E 1984 e voe krouet *Stourm ar Brezhoneg (SAB)*. Ur bern panneloù-hent a voe libistret gant liv du un tamm e pep lec’h e Breizh met dreist-holl e Bro-Dreger er penn kentañ. Paeañ telloù-kastiz a reas tud *SAB*, gwallgaset e voent gant ar polis ivez. Merkañ a ra splann ar pennad-se e oa un emzalc’h kilstourmer spontus gant kazetennoù ar vro. An *Télégramme* dreist-holl, a renas ur c’houlzad divrudañ enep *SAB*.

« N’eo ket achu stourm evit ar brezhoneg, » eme aozer ar pennad. « Ne vo ket dre lezennat hepken e vo saveteet ar yezh met dre ober ganti. »

Ur pennad-kaoz a zo gant Lan Tangi e penn ar gevelouri (*Scop*) *Roudour* hag unan all gant Sten Charbonneau, ezel ti-embann *APLUD*, bet ijinet ganto ar c'hoarioù *Klask ar Ger* ha *Din an Dorn*.

Trevadennerien deuet eus Kembre o doa dilestret e Patagonia e 1865 ha krouet e voe ganto Y Wladfa. Setu aze danvez pennad Paol ar Meur en niverenn-mañ hag ul lodenn eus e bennad a zo gouestlet da d-Tegai Roberts, memor vev Y. Wladfa, aet da Anaon e 2014.

Lenn a c'heller ivez ar brezegenn bet distaget gant Erwan Vallerie da geñver Lid an Erminig 2014, bet dalc'het e kastell Duged Breizh e Naoned.

El lodenn lennegel ez eus barzhonegoù diwar bluenn Youenn Gêrvalan *Burn out* ha *Gwerz ar waremm gozh*. Un dek levr bennak a zo meneget er rubrikenn *Keleier an embann*, skrivet gant Alan Botrel. Skrivet en deus ivez un tamm kontadenn verr *çavusin*.

TH

> Hor Yezh (280)

Kerzu 2014. Lenn a c'heller pebare lodenn *Geriaoueg ar gwez frouezh* gant Fulup Lannuzel. Pledet en deus en dro-mañ gant termenoù hollek hag a dalv evit al liorzhoù hag al labour-douar (*Adventice, Auxiliare, permaculture, sol, limonk bois raméal fragmenté, fertiliser*).


Antoine Châtelier en deus savet ur pennad diwar-benn an tu-gouzañv e lennegezh Gwened. Studiet en deus *En or ag er Vuhé Devot* gant Jilvestr

Seveno ha Yann Marion. Digoret en deus ar studi da skrivagnerien all evel Loeiz Pourchas, Yann-Mari Ewan Heneu ha Loeiz Herrieu. Pa lenner skridoù gwenedek e c'heller en em gavout gant teir araogenn disheñvel *dre, da* ha *get* evit sevel an tu-gouzañv.

Ur pennad dianav gant Youenn Drezen ? Kavet en doa Martial Ménard er gazetenn *Mouez ar vro* (1920) ur pennad sinet gant an anv-pluenn Ar Mouskoul. Diwar studiañ heñvelderioù geriadurel etre ar pennad-se ha skridoù all gant

Y. Drezen e c'heller soñjal eo bet skrivet ar pennad gant ur skrivagner brudet er Vro-Vigoudenn.

Erwan Vallerie en deus savet ur pennad berr a-zivout an elfenn *isar*; *iser* e stêr-anvadurezh Breizh (pennad bet savet gant Herve Bihan, HY, niv. 279).



Goude e kaver en niverenn-mañ un toullad pajennoù gant Herve Bihan : notennoù hen ha krennvrezhoneg.

E notennoù yezh en deus studiet Martial Ménard div douadell : *Palle tette biach* (Ar varn diwezhañ) ha *Nosiagren* (Buhez Loeiz Eunius) hag ar ger *kraban* ivez.

E-touez lennadurioù Herve Bihan ez eus anv gantañ eus *Geriadur Pryfysgol Cymru* rak emañ ar Gembreiz o paouez adaozañ o lec'hienn : www.geiriadur.ac.uk. « Gant kement-mañ, eme Herve Bihan, e weler pegen pell e vêr amañ a gaout ur seurt benveg. Ha koulskoude zo danvez d'en ober, un danvez dastumet abaoe bloavezhioù. Mendare ne chomo ket an traoù-se da louediñ. Ezhomm bras zo sevel ivez hon Geriadur Meur ».

E-touez an dielloù emañ *Nouël Bugale Breiz-Izel* gant Laouenanig ar Roz -Koñstañza ar Merer (dielloù Yann-Erwan ar C'horr) ; *Kantig Itron Varia Gavel*, *Kantik an Islandeed hag ar besketaerien* (Dielloù Gilbert Geffroy) ; *Glac'har un den yaouank deus Plouaret* (Koñstañza ar Merer). Hag evit echuiñ brav ar bloavezh emañ roll ar pennadoù embannet e 2014.

TH

vrezhonek e Roazhon en-dro d'an tiegezh Louarn, *Oaled Sant Erwan* e Brest krouet gant Youenn Souffez. Menegiñ a ra ivez taol-arnod Paol Kalvez ha tiegezh Malo Louarn *Les Hinogues* nepell eus bourk Pempont. Menez-Kamm e Spezed, *SCI Oaled Diwan* e Treglonou, *Minihi Levenez* e Trelevenez kaset da benn gant ar beleg Job an Irien ha *Tiegezh Santez Anna* e Roudoualleg.

> Brud Nevez (307)



Bet eo **Brud Nevez** o c'hou-lennata an dud a ra war-dro *Radio Kerne*, *Radio Arvorig*,

E sigur oberenn Kant gant Olavo de Carvalho, lakaet e brezhoneg gant Ewan Delanoy. *Doue ne sell ket a-gorn diwar-c'horre* a zo bet savet gant Yann Talbot (memes pennad a gaver er gelaouenn *Al Lanv*, niv. 133).

Notennoù diwar-benn an darvoudoù a zo bet savet gant Yann Maneguen

TH

Radio Kreiz-Breizh, *Radio Bro-Gwened*, *RCF Radio Rivages* ha *France Bleu Breizh Izel*. Ha Yann-Ber Thomin, war ar marc'had, a ra war-dro ar gevredigezh *Brudañ ha Skignañ* a glask lakaat ar radioioù lec'hel da genlabourat, hag a glask heñchañ Yann Rouedad, dezhañ da gavout an abadennoù hag ar podskastoù a vourro ar muiañ ganto. Dedennus eo testenioù hag evezhiadennoù ar gazetennerien aterset. Diskouez a reont roll pouezus ar radioioù evit dazont hor yezh : reiñ da glevet d'an nevez-vrezhonegerien pouezioù-mouezh ha troioù-lavar ar vrezhonegerien

a-vihanik eus pevar c'horn ar vro, pe reiñ tro d'ar vrezhonegerien a-vihanik da voaziañ ouzh an nevez-vrezhonegerien, a-fet pouez-mouezh koulz hag a-fet gerioù nevez. Ha c'hoazh, plantañ ar yezh war tachennoù difraost betek-henn, evel hini ar c'hrogadoù melldroad displeget e brezhoneg. Muioc'h-mui a dud a ra gant Internet evit tapout an abadennoù radio-se : ouzhpenn 1 400 den a zeu bep sizhun da dapout un abadenn war *radiobreizh.net*, hep derc'hel kont eus ar selaouerien a ya war-eeun war lec'hienn ar radio-mañ-radio.

E rann al lennegezh e reer anaoudegezh gant Marcel Divanac'h (1908-1978), bet ganet e Leskonil, ha marvailher anezhañ. Unan eus e gontadennoù e brezhoneg a vez embannet en he hed er gelaouenn : *Filhor an Diaoul*, liv ar c'hontadennoù hengounel ha marvailhus warni, kontet en ur yezh bev-birvidik.

Ur pennad-kaoz fromus a-walc'h a ginnig Jean-René Mahé, bet divarrek da lenn ha da skrivañ e-pad pell, ur samm gwall bounner ha gwall

boanius. Displegañ a ra penaos eo deuet da zeskiñ lenn ha skrivañ a-raok divizout sevel ar gevredigezh *Addeski*, kement ha reiñ un tamm skoazell d'an dud anleek.

E fin ar magazin e vez roet da lenn tri fennad berr diwar-benn Modiano, aet ar *Priz Nobel* gantañ nevez zo ; Le Clezio, bet embannet gant *Skol Vreizh* un atersadenn hir ma tispleg e soñj war broad Breizh ha kendiviz ar sevenadurioù ; ha Toulhoat, an arzour-artizan aet da Anaon d'an 13 a viz Here 2014.

MBdB

> Breizh da zont (515)



Stank eo ar pennadoù en niverenn-mañ (e liv mar plij !) diwar-benn c'hwitadenn an adunvaniñ aozet gant renerien Bro-Frañs. Peseurt strategiezh kaout bremañ m'eo bet dismegañset ar Vretoned ha nac'het adunvaniñ o bro ?

Emile Granville (*Parti Breton*) a laka ar gaoz war raktres al linennoù hent-houarn nevez a vo aozet gant an *SNCF*. Evel *UDB*, ar *Parti Breton* n'eo ket bet kendrec'het tamm ebet gant ar pezh a vez kinniget. Lakaat a ra ar gaoz ivez war arc'hant an *DRAC* hag an emglev bet sinet etre ar stad hag ar rannvro : netra nevez ha

netra a dalvoudegezh e gwirionez evidomp-ni. Christian Rogel en deus savet ur pennad diwar-benn ar vanifestadeg a oa bet aozet gant *Unser Land-Le* (ar strollad Alzasian) e Clamar enep unaniñ Loren, Elzas ha Champagne-Ardenne. War ur skritell vras e oa bet skrivet : « *Elsasser sin mir, Elsasser bliewe mir* » (Elzasianed omp hag e chomimp). Erwan Fouere en deus skrivet ur pennad diwar-benn Katalonia ha doareoù enepdemokratel ar gouarnamant e Madrid.

Div bajennad e brezhoneg a zo en niverenn-mañ : pennad Fañch Kerrain war *Politikerezh an diskelaouiñ* : e Ukraina en dro-mañ. Ar pennad all a zo bet skrivet gant Yann Duchet diwar-benn daou levr bet skrivet gant Fañch Kerrain : *Prederouriezh pe Philo-sophia* ha *Keal Doue war-lerc'h Auschwitz* (*Mouladurioù Hor Yezh*).

TH

> Le Peuple Breton (612)



E-barzh **Le Peuple Breton** niv. 612 ez eus bet savet un teuliad hir war an dezougen gant an tren e Breizh. Dileuridi *UDB* er rannvro a ro o ali war ar raktres nevez evit liammañ Breizh hag al Liger-Atlantel (*LNOBPL*). N'eo ket ur raktres mat. Dav derc'hel kont eus an hent a rank an dud ober etre o zachenn labour hag o zi en-dro da kêrioù bras evel Naoned ha Roazhon da skouer hag ivez an hent a rank a bep seurt tud, skolidi da skouer, ober bemdez etre kêrioù bihan (Landerne-Brest, Kemperle, Hennbont, Gestel war-zu an Oriant, An Alre war-zu Gwened...) hag e

ranker kreskiñ niver an trenioù neuze. Al liamm Kemper-Brest a rankfe bout gwellaet, Pondi ha Loudieg a rankfe bout liammet ivez, ha memestra etre Roazhon, Kastell-Briant ha Naoned.

Kaoz zo ivez eus c'hwi-tadenn an adunvaniñ, eus troiad E. Valls, ar c'hentañ maodiern e Breizh, eus an dizalc'hiezh evit Kaledonia-Nevez, dihun an Indianed er Stadoù-Unanet.

Levr ar miz dibabet gant Klaod Thomas a oa : *Jules Gros. Une vie à l'écoute du breton populaire*, gant Daniel Giraudon (*Yoran Embanner*).

El lodenn vrezhonek e tispleg Maxime Touzé deomp piv eo Nicola Sturgeon, ar vaouez a zo e penn gouarnamant Bro-Skos goude m'en doa Alex Salmond (*SNP*) roet e zilez d'an 18 a viz Gwengolo 2014. Difenn he bro a fell dezhi ober ha kaout an dizalc'hiezh.

Gant Loig Jade ha Jerald ar Gov ez eus anv eus *Ar Redadeg 2014* hag ar skoa-zelloù arc'hant a zo bet roet. Evit ar wech kentañ ez eus bet roet arc'hant d'un embregerezh

evel *APLUD* (ganto ez eus bet skignet c'hoarioù nevez evel *Klask ar ger pe Din an dorn*). C'hoant o defe tud *Ar Redadeg* arc'hantaouiñ raktresoù brasoc'h gant ur sammad arc'hant brasoc'h (tro 60 000€) ivez war dachennoù nevez : bed ar sport, ar skinwel, ar c'hoarioù-video hag an dañs da skouer...

Paol ar Meur en deus lennet levr Jean-Louis Brunaux *Les Celtes, histoire d'un mythe*. Ar Gelted kozh, ur sell war ur vojenn. Un implij ideologel a zo bet graet eus ar Gelted. Paol ar Meur ne lavar ket en e ben-nad avat e skriv L. Brunaux en e levr e oa bet ijinet ar *Barzaz Breiz* penn-da-benn gant Hersart de la Villemarqué evel

m'en doa graet James McPherson en e raok.

En e rubrikenn *Du ha Gwenn ha plas da lenn* ez eus kaoz gant Herve Lannuzel eus *Dremm an Ankoù* gant Abeozen (*Al Liamm*), *A-dreuz ar c'hantvedoù* gant Herve Gouedard (*Al Liamm*), *An Aon Ruz* gant Maela Ily ha Sonia Orriger (*Embannadurioù Goater*) ha *Komedienn mil luiet* (*The comedy of errors* skrivet gant W. Shakespeare) troet gant Marie-Hélène Morvan ha Sylvain Botrel, embannet gant *Skol Vreizh*.

Morgan Tremel en deus savet un diverrañ eus niverenn 407 *Al Liamm*.

TH

NOTENNOÙ

Annaig KERVELLA
Tudual HUON

HOR MIGNONED

Kaňv :

War niverenn 407 *Al Liamm* e oa bet skrivet, diwar fazi, e oa aet Riwanon Kadoled da Anaon d'an 8 a viz Gwengolo 2014 pa oa d'an 8 a viz Du 2014. Hon digarezit evit ar fazi mantrus-se.

Aet eo Guy Etienne (anv-pluenn : Abanna) da Anaon d’ar 6 a viz Genver 2015. 87 vloaz e oa. Gantañ e oa bet krouet ar gelaouenn *Emsav* hag an ti-embann *Preder*. Edo e penn ar gelaouenn skiantel *Lavar ivez*.

PROFOÙ

Miz Kerzu : Jean FUZELLIER ; Hugues BRY ; Evelyne
 RAOUL-GUILLAUMIE ; Yannig AUDRAN ; Louis BODIVIT ;
 Erwan JEUSSET ; Jañ-Mai DRAPIER ; Patrick CADOREL ;
 Gildas LE BIHAN ; Michel LE HIR ; Daniel PETON ; Yann
 VERNEY ; Christian ROGEL ; Eric PIANEZZA-AR PACH ;
 Christian LE GOFF ; Noël PEYR ; Erwan CONNAN ; Fulub

KADORED ; Bernez KADORED ; Goulven THOMIN ; Georges GUEVEL ; Jean-Yves ALLAIN ; OUESTELIO

— War un dro : 881€

Miz Genver : Jef GEDEZ ; Gweltaz AR FUR ; Ronan AN HENAFF ; Yann AN AOD ; Bernard AUDIC ; Lukian KERGOAT ; Daniel KERNALEGENN ; Gaod ZWINGENBERGER ; Henri LE BORGNE ; Madalen AN AMOUR-LE GUILLARD ; Denez PICHON ; Gérard ROLLAND ; Hermenegilde CADOUELLAN ; Yann-Fañch BURLOT ; Fañch PERU ; Fañch KERRAIN ; Jean-Pierre CLOAREC ; Yvon ABIVEN ; Alain MINIHY ; Erwan-Weltaz VALLERIE

— War un dro : 412€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHEROÙ

Postel digant Dominique Allain d'an 23-12-2014 :

Ur ger pe zaou da c'houlenn eskuz diget lennerion *Al Liamm*.

Arruet niverenn 407 (Du-Kerzu) *Al Liamm* genin e oan bet enoret-bras é welet ma anv e-mesk ar skrivagnerion veur degemeret e “Pantheon bev” arzourion ar bluenn. Souezhet on bet é welet e oa embannet un danevell a greden aet d'an difallaj da vat abaoe pell. Ken pell ma 'm boa hi diverchet a-ziâr ma urzhiataerez. Kenkoulz lâret deoc'h nend on ket sot get pezh a skrivan ur wezh distanet d'am spered kroueour ha bout kousket c'hwek un noziad a-bezh.

Ma, esmaet un disterrañ, ur seurt, em eus adlennet an danevell e kaoz. Ha diamig ruz ! Kavet em eus e-barzh enni farioù mezhekaus ha da gloziñ an destenn ur pennadig a hañval degouezhout ken mat hag un tamm bouzell àr ur parked siret. Komañs a ra ar pennad

diwezhañ-se dre « **Patron...** » hag achuiñ get « **... ar patron sot.** ».

Me a soñj genin bremañ am boa skrivet ar linennadoù-mañ evit derc'hel soñj ag un dra bennak da enframmiñ em zestenn e-kerzh ma labour, ha disoñjet goudevezh d'o diverchiñ a-raok kas ma danevell da pennskridaozer *Al Liamm*. Kroueret fall ma labour genin...

roll an uioù-koukoug anatañ :

agaoz >> a-gaoz – ha c'hwi wel >> ha c'hwi 'wel – ar barr... azezet àrnezh >>... àrnezhon –

... pezh a c'hellemp kadarnaat neoazh... ar ger neoazh da zilemel, displet aze – adistribilh >> a-zistribilh / e-distribilh (n'em eus kavet **distribilh** er geriadurioù, **istribilh** hepken (**a-skreibilh, e-skourr, e-pign, a-ispilh...** neoazh an 'd-' e hañval din em bout eñv klevet, get ur ster a « **istribilhet d'an- treuz** » --

Setu, dav e vo din teurel muioc'h a evezh d'am labour diàr vremañ.

Kourajit !

Postel digant Jil Boucherit :

War niverenn 403 *Al Liamm* e oa bet embannet *Tatanka Iyotanka*. Faziet e oan p'am boa skrivet e oa bet goustilhet *Sitting Bull*, tennet e oa bet warnañ kentoc'h, e Fort Yates. Crazy Horse eo an hini a oa bet goustilhet e Fort Robinson.

STAJOÙ ROUDOUR

Stajoù berr a vez aozet bep bloaz gant *Roudour* da vare ar vakañsoù skol. Unan a oa bet e Kemper e miz C'hwevrer hag unan all e Brest e miz Ebrel. E-pad an hañv e vo peadra da zeskiñ brezhoneg ivez : 8 staj a vo dalc'het gant *Roudour*. Tri lec'h nevez

a vo kinniget ar bloaz-mañ : Konk-Kerne hag An Oriant e miz Gouere ha Landelo e miz Eost.

Ar stummadur barrekaat a grogo d'an 2 a viz Ebrel 2015. Digor eo d'ar stajidi o deus heuliet ur stummadur 6 miz ha d'an holl re a oar brezhoneg hag a fell dezho mont pelloc'h gant ar yezh.

2015 eo bloavezh 20 vloaz *Roudour*. Kinniget e vo abadennoù lidañ a-hed ar bloavezh. Ezhomm ez eus tud a-youl vat prest da sikour pe da reiñ mennozhioù nevez da skipailh *Roudour* evit aozañ abadennoù a-feson.

www.roudour.com

Karaez : 02 98 99 75 81

Kemper : 06 52 01 18 57

Gourc'hemennoù da Sylvie Quermeur, Jennifer Dubois ha Monique Gentil o doa gounezet Priz ar gevredigezh da geñver abadenn ar Prizioù e Logunec'h er miz tremenet. Graet o deus anaoudegezh an eil gant eben e-pad stummadur hir Roudour 2013-2014 hag ur vagouri e-lec'h ma vez komzet brezhoneg ouzh ar vugale o deus krouet e Karaez.

A-berzh skipailh Roudour

PRIZIOÙ 2015 DAZONT AR BREZHONEG _____

D'ar Gwener 23 a viz Genver e oa bodet e Logunec'h un dibab eus ar re a grou, a sav hag a stourm da ziorren plas ar brezhoneg en hor c'hevredigezh, hiziv an deiz.

Ur bodad-barn, ennañ 7 a dud, en doa ar garg da lenn, selaou, sellet hag en em soñjal war an obererezhioù a oa bet kaset da benn e 2014. Ar bloaz-mañ e oa :

Mich Beyer, skrivagnerez - Douarnenez

Gweltaz Adeux, kaner rock - Naoned

Ronan Postic, Ofis Publik ar brezhoneg - Gwened

Laetitia Fitamant, animatourez radio - Ploneiz

Steven Guegueniat, e penn un embregerezh - Brest

Trefina Kerrain, labourerez sokial, kronikennoù a skriv er gazetenn *Pobl Vreizh* - Roazhon

Stefan Carpentier, implijad *Divyezh* (kevredigezh kerent bugale ar skolioù publik), skrivagner - Plegeneg

Kenaozet gant *France3 Breizh* hag *Ofis Publik ar Brezhoneg*, abadenn *Prizioù Dazont ar Brezhoneg* a oa bet skignet d'ar Sul 25 a viz Genver war 4 departamant hag adskignet d'al Lun 26 a viz Genver war departamant al Liger-Atlantel.

Setu amañ al loreidi bet enoret er seizh rann :

Embregerezhioù :

Naoned Eyewear, lunedour en Naoned, lec'hienn e brezhoneg, un anv brezhonek da bep re lunedoù.

Aplud, krouer c'hoarioù e brezhoneg (*Din an dorn* ha *Klask ar ger*).

Instant Gestion, en deus krouet ur meزيant evit fichennoù-pae e brezhoneg.

Kevredigezhioù :

Lusk, un ti skoazellerezed-mamm ma vez komzet brezhoneg d'ar vabiged.

EduBreizh, kelenn brezhoneg dre ar genrouedad.

Ya-ouank, lec'hienn-perzhiañ evit ar re yaouank.

Strollegezhioù :

Mirdi ar paludoù-holen, e Bourc'h-Baz, brezhoneg par-ouzh-par gant ar yezhoù all er bonnoù etreoberiat.

Levrioù faltazi :

Bili er mor, danevelloù gant Annie Coz (Emb. *Skol Vreizh*).

En dro d'al lenn-vor, danevelloù gant Jef Gedez (Emb. *Al Liamm*).

Ar pezh a blij din, levr evit ar vugale gant Soazig ha Saig Pouldu, skeudennaouet gant Noémie Lassalle (Emb. *An Alarc'h*).

Pladennoù kanet e brezhoneg :

N'int ket deuet a-benn da ziwriziennañ ac'hanomp..., Rhapsodya (Emb. *Paker Prod*).

Koumoul du, Jakez & Bleuenn ar Borgn.

Takenn Dour, Arneo (Emb. *Compimusic/Coop Breizh RFI*).

Kleweled :

An dianav a rog ac'hanon, sevenet gant Avel Corre (*Tita prod*).

Malo, sevenet gant Benjamin Botella, skrivet gant Géraldine Berry hag Etienne Strubel (*JPL Films*).

Anavezout Breizh, savet gant Jean-Jacques Monnier hag Olivier Caillebot (*Skol Vreizh*).

Brezhoneger ar bloaz :

Herve Sebill Kernaoudour, renet embannadur *Geriadur brezhoneg Treger-Goueloù Kerne-Uhel* Frañsez Vallée (Emb. *Kuzul ar brezhoneg*).

Monique Gentil, kengrouet *Mammigoù* gant div vaouez all, un ti skoazellerezed-mamm ma vez komzet brezhoneg d'ar vabiged.

Quentin Morvan, lakaet gantañ e brezhoneg kanaouenn hollvrudet *Get lucky* krouet gant ar strollad *Daft Punk*.

Al loreidi gentañ o deus resevet un oberenn e koad savet a-ratozh gant al livour Fabrice Thomas hag ur chekenn a 1500 euro

a-berzh ar Rannvro. Al loreidi all o deus bet peb a chekenn 500 euro.

Gourc'hemennoù dezho holl.

E-kerzh an abadenn o doa bet tro an arvesterien da welet ar strollad *Granit 56*. Dic'horthoz e oa gwelet ar c'haner hag ar sonerien o kinnig kanaouennoù brudet eus ar bloavezhioù 60 ha 70 (*Highway to Hell, Souvenirs-souvenirs...*) troet e brezhoneg. Peadra da vout souezhet, da zañsal ha da gaout un tamm fent.



©Yannick Derennes

GOUEL AN HAIKU GANT TAOL KURUN 2015

E-pad tost ur mizvezh e vez kinniget leun a draoù e bro Gemperele gant gouel *Taol Kurun*.

En o zouez ur genstrivadeg haiku a ra berzh bras. Ar c'han a oa dodenn ar bloaz-mañ. Haiku e brezhoneg, gallaoueg ha galleg a oa tu kas d'an aozerien. Ur bodad-barn en doa ar garg da zibab tri e pep rummad. Evit ar brezhoneg o doa bet Alan Kervern, Mai-Ewen, Bernez Tangi hag hor c'heneil Malo Bouëssel du Bourg da zibab e-touez an 327 bet kaset e brezhoneg. D'ar Sadorn 17 a viz Genver e oa bodet al loreidi el levrdis *Penn da Benn*, plasenn Sant-Mikael e Kemperle. Distaget en doa Malo Bouëssel du Bourg ur

brezegenn a zisplege fraezh istor ha reolennoù pennañ ar sevel haiku. Da c'houde e oa bet enoret al loreidi.

E rumm ar vugale eo aet ar maout gant : Jeanne Lautridou ha Brewen Bouedeg eus skol Diwan Banaleg hag Aelwin eus skol Diwan Kemperle.

E rumm ar grennarded : Gaid Guyomar, Malo Tournelleg hag Owen Kalvez eus skolaj Diwan ar Releg.

E rumm an dud deuet : Gi Peñseg eus Kemperle, Annaig Kervella eus Roazhon ha Christiane Bonniec eus Lannuon.

Tro hor bo da gomz hiroc'h eus ar seurt barzhoniezh japanat-se en un niverenn all da zont.

AR REDADEG E 2016

Loc'hañ a raio *Ar Redadeg* eus Sant-Ervlan d'an 30 a viz Ebrel hag erruout e Lokoal-Mendon d'ar 7 a viz Mae. E 2014 e oa bet dastumet 171 616€. 125 000€ a zo bet gouestlet d'ar raktresoù dibabet ha da Ziwan, 40 000€ a vo miret evit mont en dro *Ar Redadeg* 2016.

DIBAB

Ur gensavenn eo *DIBAB-Décidez la Bretagne*, bet savet e Gwengolo 2014 gant tud yaouank eus Liger-Atlantel. Adaozadur tiriad Frañs hep derc'hel kont eus youl hag ali an annezidi en deus broudet an izili da sevel votadegoù disofisiel gant asant ar c'humunioù. O fal ? Reiñ tro d'ar geodidi da lâret o soñj splann ha sklaer. E Sant-Widel (44) e oa bet aozet ar votadeg gentañ gant disoc'hoù mat : 20% eus an dud oa bet o votiñ ha 75% a oa savet a-du gant Liger-Atlantel stag ouzh Rannvro Breizh. Daou c'houlenn a zo bep tro : a-du evit Liger-Atlantel e rannvro Breizh ? Hag : a-du

evit ur c’huzul bodet ennañ ar c’huzulioù-meur mui hini ar Rannvro ?

E miz C’hwevrer e oa bet votadegoù e Langoued (35) hag e Saoudan (44). Un doare pleustrek da lakaat an holl d’en em soñjal, da eskemm ha da gemer perzh e dazont Breizh.

SKOLAJ DIWAN AR MOR-BIHAN A ZILOJO _____

Staliet eo Skolaj Diwan ar Mor-Bihan 2 straed Jean-Marie Allanic e Gwened. Divizet eo bet gant Kuzul Departamant ar Mor-Bihan prenañ ul lodenn eus ar skol-poliserez bali ar Rezistañs e Gwened evit adlojañ ar skolaj eno.

Labourioù a vo graet ha gellet a raio ar skolaj en em staliañ da vat a-benn distro-skol Gwengolo 2016.

KENDALC’H KELTIEK ETREVROADEL 2015 _____

Dalc’het e vo en Iwerzhon, e Chorcai (Cork) eus an 20 d’ar 25 a viz Gouere 2015.

Evit gouzout hiroc’h : www.ccheilteach.ie – Prezidant skourr Breizh : Yann Guillamot - 11 straed ar Forn Raz -2900 Kemper.

RENÉ VAUTIER _____

Aet eo ar seener filmoù René Vautier da Anaon e penn kentañ ar bloaz-mañ. Bet e oa ganet e Kameled e 1928 ha bevañ a rae e Kankaven. Ur stourmer oa bet a-hed e vuhez gant ur c’hamera e-giz oustilh ha lakaat ar skeudennoù da zispakañ darvoudoù a veze tavet warno re alies. E-touez e filmoù brudetañ e kaver *Avoir 20 ans dans les Aures*, *La folle de Toujane* pe c’hoazh *Afrique 50*, e film kentañ. Unan eus kengrouerien *Gwarez Filmoù* oa bet ha stummet en doa

kalz tud war dachenn ar sinema. E-touez oberennoù ar seener ez eus unan a zo aet da ludu p'eo bet devet ar skouerenn nemeti : *Un homme est mort*. René Vautier en doa filmet dre guzh, e 1950, manifestadegoù al labourerien a oa oc'h adsevel kêr-Vrest bet bombezennet e-pad ar brezel. Ul levr bannoù treset a zo bet savet e galleg diwar an darvoudoù skrijus-mañ gant Kris ha Davodeau. Lakaet e vo e brezhoneg dizale gant an ti-embann *Nadoz-vor*. Un doare da enoriñ an hini a zo aet ken alies a-benn d'ar galloud.

FEST-NOZ SKOAZELL DA SKOL AN EMSAV _____

Evel kalz eus ar c'hevredigezhioù 1901 emañ *Skol an Emsav* en ur pleg fall e-keñver arc'hant. He stajidi 6 miz a aoz ur fest-noz e Roazhon d'ar Sadorn 7 a viz Meurzh, sal Carrefour 18, straed Spagn, adalek 8e30 noz. Gellet a reer skoazellañ ar fest-noz en ur vont war lec'hienn *Ulule* ha dibab e skodenn-skoazell : 5, 10, 25, 50 euro hag all. Kinniget e vez a bep seurt hervez sammad ar prof graet : tikidi evit mont d'ar fest-noz, banneoù da bakañ e-kerzh ar gouel, koumanantoù... Ha mont d'ar fest-noz kenkoulz all !

Estreget stummañ ha kenteliañ war ar yezh e ra *Skol an Emsav* e bro Roazhon. Abaoe 1981 e teu ingal ar gelaouenn vizek kelaouiñ *Bremañ* ha 2 vloaz zo e kinnig d'an deskarded war ar brezhoneg ur gelaouenn bedagogel graet a-feson : *#brezhoneg*.

AL LIAMM O KLASK... _____

Emañ *Al Liamm* o klask, a-benn ar 6 miz o tont, ul lec'h evit mirout e stokoù levrioù.

Ul lec'h tro 100-200m², sec'h, serret ha dilogod e bro Gwengamp-Lannuon.

Kas keloù dre bellgomz pe bostel d'ar gelaouenn.